

AR BEMPOULEZENN

Traduction littéraire bretonne de la *Paimpolaise*, du chansonnier breton Théodore Botrel, par M. Ch. Rolland, de Guerlesquin.

(*War ar memeus ton evel en galek. — Sur le même air qu'en français.*)

1

O tilezel he waremmo,
Pa c'haa ar Breizad war armôr,
D'ar besketaerez en pell-bro,
En eur gimiadi deus Arvor,
Ar paotr kaez a gan,
Zioulik he hunan :
Me gar Pempoul hag he dûnenn,
He bardounn kaer hag he dour koz,
A dreïst oll ar Bempoulezenn,
A zo er vro deus ma gortoz!

2

Pa c'hêont kwit war ho listri
Ar belek 'larr dê : « Mibienn braz,
« Pedit Sant Erwan-Heloury,
« Om gwel deus ann env atao glaz. »
Hag ar paotr a gan,
Zioulik he hunan :

Na n'ëo ket ken glaz ar wabrenn,
En despet da zant Erwann koz,
Vell lagad ar Bempoulezenn,
A zo er vro deus ma gortoz!

3

Renet gant he damm steredenn,
Ar Patroum koz, dindan he zao (!)
'Larr ëo gwennoc'h he lfenenn
Eget askel eun aëlik braol

Hag ar paotr a gan,
Zioulik he hunan :

En despet dit da lfenenn,
N'ëo ket ken gwenn war da wern-faoz,
'Vel m'ëo kweff ar Bempoulezenn,
A zo er vro deus ma gortoz!

4

Ar pesketaer hep e n'em glemm
A sklap he linenn hag he grog,
A d'ober eur c'houk pa ziskenn
Deus c'hoez ann ili e n'em stog;

Ma lavar n'he gan,
Zioulik he hunan :

Kalz bravoc'h, me gred e vichenn,
Dindan ma ninselliou groz,
En kichenn ar Bempoulezenn,
A zo er vro deus ma gortoz!

5

Met alfez pa zivuno,
Ann avel grenv, ar môr treitour,
Ve bet deus he lestr ken garo,
Ma c'haa kalz outi gant ann dour!

Hag ar paotr a gan,
Zioulik he hunan :

'Vell so ezom 'benn n'em divenn
Ouspenn eur paotr henep ar Zaoz,
Me raï daou d'ar Bempoulezenn (!)
A zo er vro deus ma gortoz!

6

Met allaz! pa deuio he drô,
Galvet gant eun taol môr euzuz!

noorky
Ar pesketaer kaez a zento,
'Neur ruillenn er môr islonkuz...

'Raok mervel 'raï c'hoaz

uk Eur wech zin ar groaz :

Poket a raï d'he vedalenn

O sounjel kaout er baradoz

Eun devez ar Bempoulezenn

A zo er vro deus e c'hortoz !

CH. ROLLAND.
